



TALABAO

AR GAZETENN A RA TROUZ!

WELL: TAN ho peus?



P.28 DANEVELL

**AR
BUGEL
-BLEIZ**



P.3 DIZOLOIT...

**BOUDIG
AN TREDAN**





Niverenn 1
 Miz Genver 1987

*Diaes eo paouez da ziskuiשאן
 pa ne reer netra!*

TAOLENN

3	
BOUDIG AN TREDAN	Paskal MARC'HEG
13	
TAN HO PEUS?	Meur a zen!
21	
C'HOARIIT GANT EWEN	R.&M. AR MENN
26	
UR GERIADENN DA VARE AR RAGISTOR	Lukian KERGOAD
28	
AR BUGEL-BLEIZ	Roparz HEMON
31	
KORN AR C'HMEN	Pêr AR STEUNV

PENNAD-STUR

Ret eo henn lavaret diouzhtus, ma vo pennad-stur ebet en niverenn-mañ, nag en niverennoù da zont. N'on ket evit gouzav pennadoù-stur. Ne blij ket din bezañ sturiet, ha ne blij ket din bezañ sturiet kennebeut. Da gentañ.

Ur gêrig ouzhpenn: emomp o c'hortoz ho lizhiri (ha perak n'ho peus ket skrivet c'hoazh?), da c'houzout petra e lize deoc'h kavout e-barzh ho kelouenn. Vez, m'ho peus keleier da embann, evit buhez ho pro (abadennoù, stajoù, ...), arabat termal!

Un dra all c'hoazh: ma 'z eus danvez ur skrivagner emoc'h, diskouezit ho labour, tu 'vo d'e embann er gelaouenn. ...A-benn ar fin, deoc'h da sturiañ ac'hanomp, merc'hed ha paotred! Ac'hanta, get ma beg a-raok emeon o virout ouzhoc'h a lenn ho gazetenn! Ken ar c'hentañ,

Skipailh TALABAO



KOUMANANTIT!

...N'ho peus nemet troc'hañ ar baperenn-mañ (pe eilskriavañ anczi, ma ne fell ket deoc'h mac'hagnañ ho gazetenn vuiañ-karet), kargañ anczi hag he c'has gant ho chekenn en anv AN HERE da: TALABAO - Hent-dall Kergelenn - 29112 LANDUDAL. Trugarez deoc'h, ha joa d'ho chaosnioù, evel 'vez lâret get ur mignon din!

Va c'houmanantiñ a reot da TALABAO pa e'houre'hemenn! Ra bado ar c'houmanant:

- 1 bloavezh (100 L) 1 bloavezh, koumanant skoazell (adalek 130 L)

(N'hon eus ket diviset c'hoazh pris ar c'houmanant evit ur c'hantved.)

ANV _____ Anv bihan _____

Chomlec'h _____

Kêr _____

Amañ lakaet va chekenn a Lur, en anv AN HERE.

BOUDIG AN TREDAN



Paskal AR MARCHEG











(DA GANDERCHEL)

TAN HO PEUS?

PA VEZ yen an amzer, evel bremañ, e vez plijus sellet ouzh an tan o flammañ en oaled. Lakoet e vezer da hunvreal... Disañjal a reer ez eo an tan un elfenn dañjerus ha gounidus war-undro. Poazhañ a ra hor boued, tammañ a ra hon tiez, hogen distrujañ a ra anezho a-wechoù ha devifi a ra ivez an dud hag an natur. Start eo al liammoù etre istor mab-den hag an tan!

An tan hag ar ragistor

Pegit 'zo eo bet donvaet an tan gant mab-den? Pell-pell 'zo, ken gwir ha tra... Tro-dro 400 000 vloaz 'zo a greder, da lavaret eo da vare an "Homo Erectus", anv latin an "Den war-sav". Ur ger dibabet fall a-walc'h pa ouezer bremañ e kroge dija hendadoù mab-den da gerzhet dek milion vloaz araozomp-ni!..

E-touez ar c'hoshañ roudoù tan anavezet e c'hellomp menegiñ re an oaledoù e Vertessoloz, e Bro-Hungaria. An eskern kilpenn bet kavet eno a oa re un "Homo Erectus".

A-raok besañ gouest da grouiñ tan e-unan en deus ranket mab-den dastum regez en tangvalloù enaouet er c'hoadoù ha magañ ar regez-se noz-ha-deiz.

Abeg meur a drubuilh ha brezel eo an tan, an tan prizius-se! Setu aze danvez ar film "Brezel an Tan" ho peus bet tro da welet, marteze. Tannet diwar romant J.H. Rosny Aîné, ar film a ziskouez buhez ar neuriadoù kentañ o tizoloñ an tan hag o tiferenn anezhañ.

Arouez ar vuhez eo deut an tan da vezañ. En em vodañ a ra an holl tro-dro d'an tantad pa 'vez re yen an amzer. Diwall a ra anezho ouzh an anevaled gouez na gredont ket tostaat ouzh ar flammenn... Krog eo mab-den da boazhañ e voued, hag implijout a ra an tan e-vit kaletaat begoù ar goafioù-chaseal.

Digarez ar brezelioù evit an tan a zo aet da get p'en deus gouezet mab-den ober tan eñ e-unan. Echu an aon da goll an nebeut regez kaset ganto en ur voestig. Besket en deus penaos kaout fulennoù dre stekiñ mein-kailhastr pe dre rimiañ daou damm koad. Entanañ a ra an c'lienneoù un dornad geot sec'h, ha setu krog an tan.





DAOUST HA BARREK E VEFEC'H
DA ENAOUIÑ TAN E-GIZ-SE?


A ET EO mab-den kalz war-raok dibaoe amser an "Homo Erectus". Er bloavezh 1987 ne gomser mui eus enaouiñ tan evel hon hendadoù, a sonjit sur a-walc'h un alumetezenn pe un direnn, tredan, gas, glaou, hag all, ha setu tomme ha gouloù en ti! Gwir eo evidomp-ni, hogen daoust hag eo gwir evit an holl? Soudet e vlot o c'houzout e vev c'hoazh tud a-vremañ evel tud mare ar ragia Menegomp amañ ar v'vashmen ("tud ar strouezheg") o vevañ er c'hKalahari, ur g'lec'h e kreisteis Afrika, ar b'Pigmeed e-kreiz Afrika, pobladoù 'zo e Suamerika pobladoù e gouelec'h Bro-Australia... Ar pobladoù-se a zo chomet pell reoù diouzh peurrest ar bed, o vevañ e-kreiz koadier pe er gouelec'h. Enaouet an tan ganto evel gwechall gozh. Kimig a reomp deoc'h klask enaouiñ tan evel...

ENAOUIÑ TAN DRE SKEIÑ

O skeiñ daou vaen-kailhastr an eil ouzh egile e welot fulennoù. Ret e vo deoc'h h'ha gortoz e kouezhe fulennoù warno. Chañs vat!

E kornioù eus Bro-Sina e vez implijet un tamm houarn pe un tamm dir evit skeiñ war un tamm maen-kailhastr. Tud Bro-Dibet a ra heñvel, dre implijout un direnn ijinat war an diazez-mañ:


DRE BOUEZAN WAR AN DORNELL-MAN E SAV AR VAEN-KAILHASTR



SEVEL A RA AR VAEN-TAN HA STEKIN A RA OZH AN AN TANN HOARR DA REIN FULENNOU

ENAOUIÑ TAN DRE RIMIAÑ

Dre rimiañ buan-buan beg un tamm koad-Akasia, da lavaret eo un tamm koad kalet-tre, war ur blankennig koad tener e krouer fulennoù. E-giz-se e vez graet gant an d'ouareg er Sahara; dastum a reont ar regez war un tamm pilh, ha dre c'hwezhañ goustadig e teuont a-benn da gaout tan.



Gant kentañ annezidi Bro-Australia e vez enaouet tan dre rimiañ un tamm koad kalet war ur blankenn koad tener ivez, hogen lakaat a reont an tamm koad da dreiñ ar buanañ ma c'hellont get o daouarn. Trawalc'h o deus gant div vunutenn evit lakaat an tan da ziwanañ!



Ar menezioù-tan

Ur genoù digor, un nor etre gorre an Douar hag e zibarzh, e lec'h na virv an doazenn, setu petra eo ur menez-tan. Pevraliesañ e koser ar menezioù-tan stum ar c'hrennikern, hogen bez' ez eus menezioù-tan ha n'int ket menezioù tann sbet, n'int neset un taull en douar...

Ret eo gwelet an Douar, hor planedenn, evel ur voull en he c'hreiz ur well egienn maen-teuz o virviñ.

Graet eo golo an Douar, ar maenisk, a vaen-bazalt. Ar maenisk n'eo neset ur c'hant kilometrad bennak tevder. Kalz eo, a gav deoc'h? N'eo koulz lavaret netra e-keñver skin an Douar, a zo 6371 Km.

Ne vez ket treuzkaset mat an toumer gant ar vaen-bazalt, ar pezh a ra eus an Douar ur gaoer-zivent, goloet mat, na kresk ar gwask betek bezañ prest da darzhañ! Aze e kavomp perzh-mat ar menezioù-tan: servijout a reont da "glaped-surentez". O tarzhañ ur wech an amzer e viront ouzh hor planedenn a darzhañ en he fezh.

Sivazh, ne ya ket ar glaped-surentez-se endro hep degas trubuilh en hon touez: distrujañ a ra ar maen-teuz k'riadennoù a-bezh, tud ha madoù. Setu perak e vez klasket studiañ a-dost ar menezioù-tan. Bez' ez eus war-dro 350 anezho hag o deus tarzhet ur wech d'an nebeutañ, hag un hanter-kant bennak all a zo bev ha gouest da tarzhañ. Tu 'zo bremañ da c'houzout en a-raok pegoulz e tarzho menez-tan, ha da brientañ diloadeg tud ar c'hriadennoù tro-war-dro. Hogen c'hoarvezout a ra c'hoazh e tarzhe ur menez-tan prim goude kantvedoù a sioulder. Setu ar pezh a c'hoarvezas e 1973 e Bro-Island, pa tarzhas

an Eldfell e-kerz un nozvezh, goude 5000 vloaz kousk. Tufañ a reas bombezennoù entanet, anezho kantadoù kilograo a bouez, war ur g'riadenning kousket sioul ouzh e droad, o terciñ toennoù hag ec'h enaoiñ tangalloù... Dre chañs, n'eo ket e Breizh e c'hellfe c'hoarvezet kesent-se, d'oust da g'ar Kesper bezañ savet war ur menez-tan, ar Fruji e anv. Warv eo ar Fruji abaoe pell 'zo, ha tud Kesper a c'hell chom kousket sioul, lezet o rakarnoù war o c'hezeg-houarn-tan!



KORN AR SKIANTOURIEN

Gouzout a ouzit sur a-walc'h n'eus ket tu da enaouiñ tan pa n'ez eus ket a aer tro-dro, ha gouzout a rit ivez ez eo ret stlepel ur vantell pe ul lañ-ger war un den a zo krog an tan ennañ.

Goude-se e ouezer ez eo ret d'an tan bezañ maget gant oksigen an aer.

Setu perak e tev buanoc'h un tamm koad eget ur galzenn levriou: bez' ez eus muioc'h a aer en tamm koad eget er bern levriou. Buanoc'h ivez e tev bruzun un tamm koad eget an tamm koad en e bezh. A-wechoù e tev ar bruzun ken buan ma tarzh: se a weler gant bleud pe gant poultr-krefiv.



Graet e vez un diforc'h etre un dra "loskus": pa vez lakaet en tan ennañ e tev e-unan, hag un dra "dilokus": a-hed an devidigezh ez eo ret degas an nerzh a zo ezhomm anezhañ evit ma kendalc'hfe da zevañ. Graet e vez ul "losker" eus an oksigen.

Bez' ez eus ivez danvezioù a vez oksigen enno, a-walc'h a oksigen evit n'o defe ket ezhomm eus an aer evit devañ. Iskiasat tra! Un tamm keluloid krog an tan ennañ a c'hell kenderc'hel da zevañ e-barzh an dour! Loskus eo ar c'heluloid ha bez' ez eus oksigen ennañ.



TANIOÙ ISKIS...

Graet e vez "taniou-foll" pe "taniou-noz" diouto, pe c'hoash "leterniou-noz", "taniou-...".

Spontet e vez tud 'na danto, ha souezhus e vezont, evit 'evir. Gwelet e vezont alies er taniou pe er c'hoadoù, tost d'ar poullou dour chag.

Setu penaos e teu un tan-foll war wel: eus korfoù bren ar pesked marv e teu er-maes ar gas a grog an tan ennañ kerkent ha ma 'vez mesket gant oksigen an aer. Bez' ez eus fosfor er gase, ha seurt danvezioù n'o deus ket ezhomm eus nerzh all ebet evit ma krogfe an tan enno!

A-wechoù e wel ar vartoloded flammennoù bihan ouzha beg guern o bag: graet e vez "taniou Sant-Nikolas", "taniou Santez-Klera", "taniou Santez-Elena" diouto. E guiriones, an taniou-se n'int nemet fulennoù o tont eus tredan an aergela'h.



Ha c'hoant ho peus gouzout




HA MA RAFEMP UN TAMM LABOUR-DORN?
KINNIG A RAN DEOC'H OBER
ETIVI-GOULAOUÏÑ!

BREOMP DA GENTAÑ GANT UN TAMM KOAD DASTUMET DIWAR AN DOUAR: UN BRANK GWEZ-TOURMANTIN PE UNAN GWEZ-SAPR. BEZ' EZ EUS ROUSIN E-BARZH SEURT KOAD, HAG AR ROUSIN EO A ZEVO, GRIT EVEL DISKOU-EZET EN DRESADENN-MAÑ.



ANAR E LAKOAT UR RUILHENN PAPER-KOAT, DA VIROUT OUZH HO PIZIED A ZEVIN GANT AR ROUSIN O SKUILHAN


UN ETEV-GOULAOUÏÑ ALL A C'HELL BEZAÑ GRAET DRE FAOUTAÑ PENN UR VAZH E KROAZ. SANKIT UN AVAL-PIN ER FAOUTENN, HA STARDIT ANEZHAN GANT SIFELENN PE NEUD-ORJAL.



Seurt etivi-goulaouïñ ne badont ket gwall bell: evit ma padfent pelloc'h ez eus tu d'o induañ gant rousin pe c'hoash gant koar ter-du (parafin).



UN INKANÉ RUZ GANT UR VOUE WENN HAG UL LOST DU... PETRA EO?



KLASKOMP BREMAÑ FARDAÑ UN ETEV-GOULAOUÏÑ ALL GANT RUSK BEZV!




div en deus savet an diellig-mañ?

AOZIT EN A-RAOK LERENNOÙ RUSK BEZY, ANEZH O AN HIRAN AR GWELLAÑ HA 3 PE 4 C'HANTIMETRAD LEDANDER KEMERIT UR VAZH ROUSINEK EEUN A-WALC'H, ANEZH 50 KANTIMETRAD A HIRDER (MUI PE VUI!). TENNIT AR RUSK DIOUZH HE FENN, A-HED UN 20 KANTIMETRAD BENNAK. GOUDE -SE E SOUBOT: PENN AR VAZH E-BARZH UR PODAD ROUSIN TOMM. GEO! GWISKIT PENN AR VAZH GANT UL LERENN RUSK BEZY, SOUBIT ANEZHAN ER ROUSIN C'HOAZH, HA GRIT E-GIZ -SE (UR GWISKAD RUSK, UR GWISKAD ROUSIN TOMM) BETEK MA TEUFE AL LERENN ZIWEZHAÑ. UR GWISKAD ROUSIN C'HOAZH, HA SETU PREST HO ETEV-SKLERIJENNA!



LAKAIT IVEZ UR RUILHENN PAPER-KAOT EVIT NA KET DEVET HO PIZIED GANT AR ROUSIN O TEVEZ



SETU UN ETEV-GOULAOUIN ALL, EVIT AR RE A BLIJ DEZHO AR C'HOULAOUENNOÙ-GOAR, GRAET EO GANT UR VOEST-MIR (DEBRIT AR RAVIOLI EN A-RAOK!) A LEUNIOT GANT UR MESKAJ 40% KOAR, 30% PARAFIN HA 30% ROUSIN. GANT KANAB, KOTORIS PE C'HLOAN PLEZHET E VO FARDET AR BOULC'HENN; SOUBIT ANEZH ER MESKAJ A-RAOK HE STALIAN, EVIT MA VEFE REUT HAG E KROGFE MAT AN TAN ENNI. HA KLINKIT AR VOEST-MIR, WAR AR MARC'HAD!

(Bruderezh kuzh!)

BLOAVEZH MAT DEOC'H,
HO MEURDEZ!
SETU MA LEVR
"LOUPIG A RA TRO AR BED"
EVIT HO PLIJADUR!

Setu ur prof
ha ne goust ket ker:
20,00 L
nemetken!!




TRUGAREZ, HA
BLOAVEZH MAT DEOC'H
IVEZ, MA MIGNON!
SETU MA LEVR
"AR ROUK KOFOK"
EVIDOC'H-C'HUI!

Setu ur prof
ha ne goust ket ker:
20,00 Lur
nemetken!!

Kasit ur chekenn en anv AN HERE (+10% mizoù-kas) da: Marivon BERR, Hent-dall Kergelenn 29112 LANDUDAL

Me 'lâro deoc'h memes-tra.

AC'HANTA! UNAN ALL C'HOAZH, EVIT HO KOUELIOU EL LIORZH! DISPLEGET EO PENAOS OBER EN DRESADENN. DIWALLIT! NA LAKAIT KET AN ETEV-GOULAOUIN-MAÑ E-BARZH UN DELTENN PE E-BARZH UR SAL SERR HE FRENTER: MA KROG AN TAN ER PLASTIK E SAVO UR C'HWEZHENN BISTRIUS DIOUTAN. TU 'ZO EVEL-JUST DA KLINKAN AR VOUTAILH-BLASTIK MA GALL DEOC'H!



NEUD-ORJAL
(Suroc'h eget sifellenn!)

BOUTAILH-BLASTIK
TROC'HEZ DRE AN
HANTER

TOULLOU BITHAN
EVIT AVELIN AN
ETEV-GOULAOUIN

KANTOLOR

BIRS EVIT
LAKAT AR
C'HOULAOUENN
D'AN UHELDER
A FELLO DEOC'H

Goude kement-se ez eo ret memes-tra dera'hel soñj eus pegen danjerus eo an tan: na c'hoarrit ket gantañ, pe anez an tan a c'hoario ganeco'h! Mar deo an tan un elfenn brisius evidomp, an tangoall avat n'eo ket.

Bez' ez eus meur a zoare da stourm ouzh an tan. Bez' e c'heller mougañ anezhañ gant traezh, pe dre deurel ur c'holoenn bennak warnañ; tu 'zo da vougañ an tan dre yenaat anezhañ gant dour; moaien 'zo c'hoazh da skeiñ warnañ evit lazhañ ar flammennoù: dre skeiñ war ar flammennoù e virer outo a greskiñ en-dro, endra ma teu an danvez da vezañ re yen evit ma krogfe an tan ennañ adarre.

Siwazh, an doareoù-se n'int ket gwall efedus pa 'vez an tan a orin strilhouriezhel. Gwashet e vez an tan diwar eoul-maen, zoken, pa 'vez taolet dour warnañ: dont a ra an eoul-maen war c'horre an dour, ha kaset e vez an tan pelloc'h dre ma red an dour. Implijet e vez neuze ul lazhañ-tan (dre c'haz, dre boultr, hag all) evit lazhañ taniou savet diwar eoul-maen, tredan... Bez' ez eus seurt binvioù e trepasoù ho skolioù hager c'hirri ivez peuraliesañ. Na c'hoarrit ket ganto, an ardivinkoù-se a c'hell saveteiñ buhez ho mignoned, hag ho hini ivez war-un-dro!



PEBEZH BINIOU
ISKIS!

Savet eo bet an diellig-mañ gant: Brieg AR MIENN, Marivon BERR, Luklan KERGOAD, Martial MENARD, Alan DIPODE, gant Poan hag Aked...

An tan en hor yezh

Amañ e kavot un troioù-lavar bennak gant ar ger "tan" enno...

Kouezhañ eus ar billig en tan
Gwashoc'h-gwashañ e ya an traoù.

An tan a oa war... (ar marc'had, ar frouezh, ar c'hig, h.a.)
Ker-ruz e oant.

Paket eo an tan dezhañ.
Marv-mik eo, echu eo gantañ.

Paket eo an tan, ha gwerzhet al ludu!
Echu eo an abadenn tout. (O tont eus Gouel Sant-Yann).

Lakaat ludu war e dan.
N'eo ket dirollet ken an den "a laka ludu war e dan".

N'eo ket bac'h toull an tan gantañ!
N'eus forsh peseurt kudenn evitañ, en em sachañ a raio atav. (Bac'h = strizh).

Ken taer hag an tan
Taer evel an tan.

An hini a grañch war an tan a bres e varv.

An tan en trebez
Glav kent tri deiz.

En tan a nebeut dre nebeut
E ya e ludu ar bern keuneud.

Emañ an tan o c'hwezhiñ,
seblant avel...

O c'hwezhañ an tan da gregiñ
E strink an elf ouzh penn an ti.

Tan kaer, min vat
paourentez, kozh dilhad.

Pa 'vez an tan e vez al laer.
Gwazh an tan evit al laer.

War-lerc'h an tan e vez evurusted
War-lerc'h al laer ne vez ket!

Ar pep tostañ d'an tan a domm da gentañ!

Pa groghe an tan en ti
e vehe losket razh al logod.

Me 'zo an tan em godell,
trawalc'h da boazhat Pariz!

Pa 'vez an tan en daou benn diouzh an ti
ne vez ket pell o teviñ!

GERIAOUEG VIHAN

Un olizenn, un inorzenn, ur oueliadenn, un tantoz = un tantad!
Se 'zo un tan graet evit ur gouel bennak, da ouel-Yann da skouer. Ur oueliadenn-rietal: un tan-arvest, un "tan-artifis".

Ur gaouad tan, ur c'horadenn tan, ur selam: ur flammad.

C'HOARIOÙ

C'HOARIIT GANT EWEN

Emañ EWEN, an dirouder, war roudoù un tangwaller dañjerus abaoe pemp devezh, ha lezel a ra skridoù-kuzh war e lerc'h evit Alan an enseller hag e archerien.

Hogen ar skridoù-kuzh-se ne vezont ket atav aes da zis-koulmañ! Evit gouzout hag-eñ ez oc'h ken barrek hag Alan (skoazellet gant e vandennad archerien), klaskit 'ta d'o diskoulmañ ivez!

Aes-tre e vo ar skrid-kuzh kentañ evidoc'h, anat eo: an tangwaller en deus peadra d'ober tan gantañ en e garr, ha deoc'h da gavout petra!

Seizh ger a zo kuzhet en daolenn. Kelc'hiet eo bet ar ger **GMER** gant Ewen evit ho skoazellañ... Kavet ar peurrest!

KAVET EM EUS, ME!
HA PAS C'HWI!


GWIR EO, NET ME
AN EUS BET UR
BUGALEAJ GNALLEDRUS!



DREIST!!
KAVET EM EUS AR
SKRID-KUZH
KENTAÑ!!


AC'ITHANNEMC'RHI
SOTARNAREID
BNUOAMHIDNEORE.

Tu all ar skrid-kuzh a zo diaesoc'h da gompren!
Koulskoude e vousc'hoarzh Alan en ur lavaret
"h'!!!? Evel-just!! Kavet em eus! Ha c'hw'i?"



Brav an taol! Degouezhet oc'h el lec'h meneget war eil tu ar skrid-kuzh kentañ... Trubuilhet eo Alan bremañ: ne gav skrid-kuzh all ebet. Ne gav m'ur seurt ti, ha dirak dor ar savadur-se nemet tammoù kleiz ha tammoù lod. Hogen... Ma sellit mat ouzh an dresadenn e ouit da belec'h mont, kudennoù ebet.

Pe anv eo an tangwaller? Evit gouzout, lakait anv pep tresadenn en e blas en daolenn-mañ...




N'EO KET UN ANVI
UL LESANV EOT

...Evit diskuizhañ ho spered un tammig, setu ur skrid-kuzh all a gavot aes, sur a-walc'h!
(Pet tamm aspirin ho peus lonket betek bremañ, lavarit deomp?)



Goude-se e oa aesoc'h kavout an hent mat! Lakaet e oa bet biroù ha merkoù-roud war an hent, hag anavezet a ran anezho, me... Setu, ma n'anavezoc'h ket anezho e vlot ampart war an dachenn-se goude bezañ desket ar re a ziskouezan deoc'h amañ!



HENT DA HEULIAÑ



HENT STANKET



GORTOZIT AMAÑ




DAOU HENT



DAÑJER



SKOILHOÙ



SKRID-KUZH A-BENN 3 C'HAMMED



HENT FALL: DISTROIT
D'AR MERK "2 HENT"!



FIN AR ROUD

...Ma war ur skrid-kuzh all:




E GWIRIONEZ, MA BUDALE EO
O DEUS KELENNET DIN PETRA
EO AN MERKOÙ-ROUD HA DA
BETRA E TALLEZONT!

T T A N H E N
N I A I H A T
E R H E N I D
H E L H T H A
U M L A F A N
O E K D A I A
A D Z E U O R

(Dalc'hit mat!)

Petra?! Krediñ a ra Ewen c'hoari gant alumetez ivez? Ma n'eo ket ur vezh! War ar skrid-kuzh-mañ ez eus un oberiadenn fall skrivet e sifroù roman gant alumetez. Ret eo deoc'h dilec'hiañ div alumetezenn evit kavout an oberiadenn vat: e-giz-se e ouiot pet kammed ez eo ret ober evit dizoloñ... ur skrid-kuzh all! Youc'houl!

POELTR FORZH NE RAN!
UN DIRENN AN EUS BET
EVIT NA DEIZ-HA-BLOAZ!



BFU PNR E'BS
WPVSI

Ne oa ket aes istor an alumetez, geo? Kemerit un aspirin all, ha setu amañ ur skrid-kuzh a gavot aesoc'h da ziskoulmañ, sur a-walc'h...
Pa 'm eus koun, n'eo ket ken mad ha se an aspirin evit ar yec'hed...



DRE CHAR'S NE C'HOULENNONT
KET DAD AR C'HABITEN!

Boulc'hurun! N'eo ket aes, an taol-mañ! Dre char's e krog ar skrid gant karate evit reiñ skoazell deoc'h! Geo, geo! Mod all e vije bet skrivet 'gouren', evel-just!



karate
tokuydl rch
avchl r-prach'm



(N'eus ken!)

Arsa! Tost echu eo ho pinijenn!

Aet eo Ewen d'ar vourc'h, ha skrivet en deus en daolenn-mañ ar pezh a zo bet pignet gant an tangwaller.

Evit kavout ar 25 tra pignet gant an amprevan-se ez eo ret deoc'h lakaat ar 25 lizherenn eus al lizherenn-mañ o flas er bann kreiz. Pa lizherenn a dle bezañ i-just, hag implijet ur walc'h-metken!

Ret en deus Alan ar goulenn dre lakaat al lizherenn V en he flas. Deoc'h da kavout ar 24 ger all...

Pa soñjan, setu amañ lizherenneg hor yezh:


A, B, K, D, E, F, G, H, CH, C'H, I, Y, J, L, M, N, O, P, R, S, T, U, V, W, Z.

...Aesoc'h e vo deoc'h diskoulmañ ar skridoù-kuzh a-ziagent, bremañ, kuita?

A	R	K	I	G	N	N	A	Z	T	U	O
K	H	O	R	M	E	A	D	Y	I	L	T
T	A	D	T	V	T	A	N	A	N	E	Z
M	U	S	P	I	L	E	N	N	O	U	L
A	V	R	I	D	A	A	N	N	B	I	G
R	U	T	A	B	A	I	E	Z	T	Z	A
T	D	E	K	O	N	E	L	L	G	L	O
I	S	E	F	K	I	F	G	K	O	P	T
A	J	R	I	L	K	E	R	H	U	V	N
L	E	R	E	Z	I	E	U	I	O	U	Z
N	O	S	F	E	M	D	I	G	O	U	H
I	N	O	D	R	U	O	D	W	O	P	I
A	B	A	G	W	A	T	E	L	L	D	F
L	M	L	O	E	O	L	P	Y	G	H	K
A	P	R	U	M	I	O	U	R	O	H	I
B	A	S	P	E	R	E	Z	E	T	A	G
A	N	T	I	R	A	A	L	O	U	Z	U
O	R	J	A	L	E	E	R	E	Z	O	O
D	E	F	O	U	R	E	T	E	Z	U	B
L	L	A	N	W	G	I	N	S	I	G	H
P	A	R	G	W	E	E	N	N	W	I	G
O	R	N	P	O	U	R	A	N	J	E	Z
S	P	E	B	O	U	A	L	A	N	I	G
K	O	R	S	I	V	B	E	A	G	H	T
K	A	R	L	A	E	H	I	L	A	N	Y



Echu eo! Echu eo! N'ho peus nemet tremen dre ur milendall evit skoazellañ Alan da gemer an hent mat evit kavout Ewen, an archerien (petra o deus graet, ar re-se?) hag an tangwaller, evel-just. Gounezet ho peus hor gourc'hemannoù!



Jaktret oa'h bet gant Riwall AR MENN evit ur skrid, ha gant e vreur Malo evit an tresadennoù. Kavet dezho ho lizher-dla evit al louzoù ho peus lonket!

Ur sell war HON ISTOR

UR GERIADENN

DA VARE AR RAGISTOR

Aet omp kalz war hor c'hiz en amzer gwechall gozh-tre: lakaomp 6000 bloaz (soñjit 'ta, 100 gwech oad Tad-kozh!).

Taalomp ur sell, dre laer, war kêriadenn ur paotrig, Abitonok e anv, hag ur verc'hig Breketa he anv.



O! Sellit, penaos int gwisket! Gant krec'hin loened ez eus bet kempennet dilhad dezho.

Kalz loened gouez a oa d'ar mare-se o vevañ er c'hoadoù bras: yourc'hed, kirvi, moc'h gouez, lern, bleizi... Chaseet e vezent evit o c'hroc'hen hag o c'hig. Desket e oa bet doñvaat lod ivez: gavr

tad Abinopok a vez kavet mat he laezh gant ar vugale.

- Yod a vo da varenn, eme ar vamm. Graet e vez gant bleud; evit kacout greun bleud e ranker kacout greun ed. Bez' ez eus: hadet e vez ed, bep bloaz, gant ar wazed. Lakaat a reont an tan en un takad eus ar c'hoad ha labourer

e vez an douar da c'houde. Er c'hornioù digoadet e vez savet an tier ivez. Lochennoù eo ar re-mañ: toet e vezont gant blefchoù goloet gant ur gwiskad mouded. E-kreiz an ti emañ an oaled. Sellit! Emañ ar maged o sevel dre un toull e-kreiz an doenn.

Luklan KERGOAD




Korn-karo kizallet e stum penn ur marc'h, 5 kantimetrad a hider, kavet er Ma d'Kail a Bro-C'hall.


Gant mein kalet e ra an dud e binvioù hag o armoù. Vont da chaseal ha da zezelif.

Skizmet e vez ar moen da zezelif, ha flouret da zezelif ouzh o rimiañ. Kalz moc'hili ha pennoù goañv bet azzet gant tud ar mare-se a zo bet dizolpet en ur ober klas-kerezh e-barzh an douar. Savadurioù a zo chomet ivez war-lerc'h tud ar mare-se: an taolioù-mein a veze beziet dindano an dud veur, ar peulvanoù (pe "mein-hir") a dalvere da zezelif an heol a veze lakaet da Zoue gant an dud d'ar c'houlz-se.

D'ober petra eo bet benet ar moen-mañ, hervezoc'h?



- Ur lod? Ur morzhol?
- Ur vouc'hal? Ur goaf?



KAVET HO PEUS? UR VOUC'HAL EO, EVEL M'HEN DISKUEZ AN DRESADENN!



DANEVELL

UN INDIAN, skuizh gant krizder ha fallentez an dud, a zilezas e veuriad evit mont da vevañ, gant e wreg hag e zaou vab yaouank, pell-pell en tu-hont d'al lennoù ha d'ar menezioù e-kreiz ur c'hoad. Eno e savas ur foukenn. N'o devez da voued nemet kig al loened gouez a lazhe en hemolc'h, da zilhad nemet o c'hrec'hin. Eirus e vezent evelato...

AR BUGEL-BLEIZ

A-benn un nebeud bloavezhioù e voe ganet ur mab all, a oa karet-dreist gant e dud hag e zaou vreur.

Un deiz avat, pevar bloaz da c'houde, e voe gwall c'hloazet an tad. Eno e oa par d'ar marv, ez erbedas d'e wreg ha d'e zaou vab henañ teurel evezh dezho ouzh an hini bihan.

Neuze e tremenas. Ar wreg ne voe ket evit padout pell gant ar rangalon. Dizeriañ a reas a zeiz da zeiz. Ne oa ket daou viz loar act e-biou ma varvas d'he zro.

Kent mervel, hi ivez a erbedas ar bugelig d'e vreur. Prometiñ a rejont dezhi beilhañ warnañ eus o gwellañ.

An daou baotr a oa neuze krennarded seitek ha c'hwezec vloaz, a vanas er foukenn, o hemolc'hiñ, evel ma oa bet desket dezho gant o zad, hag o prederiañ o breur bihan evel m'o doa gwelst o mamm ober.

Ar goañv a dremenas. Kalet e oa ar vuhez. Hogen, ken boazet e oant ouzh ar vuhez-se, an hini nemeti a anavezant, na ne ouient zoken e oa kalet...

Koulskoude, pa zeuas an nevez-amzer, e savas en o c'halon ur fromadenn vras. Gouzout a raent e oa, tu bennak an tu-hont d'al lennoù ha d'ar menezioù, o doa treuzet gwechall, tud heñvel outo. En un taol e krogas enno un hir-aezh divent da vont davet an dud-se. Yaouank-flamm evel ma oant, ne chomjont ket pell etre daou vennozh. Ur mintin e kuitajont o foukenn, netra ganto nemet o gwaregoù hag o c'hontilli, o kas o breur bihan war o lerc'h.



ROPARZ HEMON

Ne ouient dare pegeit e padje ar veaj. Plijadur o doe da gentañ. Gant ar bugelig pemp bloaz ne oant ket evit kerzhet buan, hogen forzh ne raent. Ivez, ne ouient ket dres pe hent kemer. Bendez o doa spi da gejañ gant un den, spi da welet foukennoù en tu all da bep menez.

Brav ar bed e-pad meur a zeiz. Betek ar poent ma spurmantjont, gant an nozioù e hiraat, er gwez, en avel, en oabl, kentañ diougan an diskar-amzer.

O c'hroc'h a c'hoarvezas avat, rak edo e kemañ o treuziñ menezioù uhel, serc'huyen, latarek. War rouesaat ez ae ar bened, ha diaes e oant da bakañ. Ar c'hoarvez, skuizh-bras, a c'helle a-benn bale. Ma tivizas e zaou vreur e zontas, pep hini d'e dro.

Ar bet a raent ken buan ha ma c'helljont. Hogen, kaer o doa, edo o nerzh o vont diouto.


Un abardaez edont tamolodet e goudor ur bedig strouezh da dremen an noz. A-daol-trum, war dremm an heol o kuzhat, e nijas dre an aer ur bouttreñ wenn: kentañ malzennoù erc'h ar goañv.

An daou vreur a sellas an cil cuzh egile, ha neuze ouzh ar bugelig a gouske flour, paket en un tamm kroc'hen bleiz evel en ur vailhurenn. N'o doe ket ezhomm da gaoseal evit gousout en doa an hevelep soñj treuzet o spe-red. Sevel a rejont, startañ gwelloc'h ar c'hroc'hen en-dro d'ar c'hrouadur, ha pellaat hep ur ger, ouzh e lenel e-unan-penn da gousket, hep teurel ur sell a-dreñv.

A-hed an noz e kerzjont, pouner o c'halon evel ur maen en o c'hreis, heñveloc'h ouzh daou dasmant o risklañ dre un humvre eget ouzh tud. Ha kerzhet a rejont c'hoazh a-hed an deiz, ha c'hoazh a-hed an noz hag ar mintin war-lerc'h.

Da greister e kouezhjont semplet, divi, war an douar. Pa zeujont enno o-unan e oa tud en-dro dezho en ur c'helc'h o sell, sebet ha spouronet ouzh an daou gremard hanter-noazh, trent evel relegoù-eskern.

Tud e oant eus o fobl. Boued hag herberc'h a voe roet d'an daou gaezh. Tamm-ha-tamm e tistroas enno an nerzh hag ar yec'hed.



Lakaet e voent da chom en ur foukenn a-raok o degemer er meuriad hervez al lidoù ret.

Un noz, e-kreiz ar goañv, an eil breur a voe dihunet gant un trous, evel ul loen o turiañ an erc'h e-kichen an nor. Neuze e klevas ul leñvadenn, ha neuze ur vouezhig o c'hervel.

Setu a lavare:
- O va breudeur, o va breudeur, emañ o treiñ da vleiz!

- Mouezh hor breurig eo, eme an eil breur.

- N'eo ket, eme ar breur henañ, n'eo nemet an avel...

Ar vouezhig avat, a c'halvas us trede gwech:


- O va breudeur, o va breudeur, emañ o treiñ da vleiz!

- N'eus kat a fazi! Mouezh hor breurig eo! a huchas an eil breur.

- Mouezh hor breurig eo! a huchas ar breur henañ ivez.

Hag hi sevel en ul lamm, ha digemmet an nor.

...Ouzh skleur al loar, o lesa roud e bavioù war e lerc'h, e oa bleizig o tec'hel dre ar gwez.



"AR BUGEL BLEIZ" a zo ur marvailh a Norsamerika eus poblad an Irokta.

KORN AR C'HWEN

Amañ e kavot, a niverenn da niverenn, pajennad ar re a zo dedennet gant an urzhiaerezh. Dre ma ne 'vez kavet er skolioù nemet binvlji THOMSON o anv, ne vo savet ar rolloù-urzhioù nemet evit T07, T070, M05 ha binvioù kenrezus.

BIZSKRIVIT AR ROLL-URZHIOÙ-MAN WAR HO TOUCHENNAOUEG, NAG E VIOT SOUEZHET! SKRIVIT DEOMP MA SAV UR GUDENN BENNAK HA RESPONDET 'VO DEOC'H ER BAJENN-MAN!

```

1000 CLEAR,,6
1100 CLS
1200 SCREEN 0,7,5
1300 'MIGOURENI
1400 DEFGR$(0)=1,1,3,7,3,17,56,252
1500 DEFGR$(1)=128,128,192,224,192,136,28,63
1600 DEFGR$(2)=56,17,1,3,3,7,7,15
1700 DEFGR$(3)=28,136,128,192,192,224,224,240
1800 DEFGR$(4)=3,1,1,0,0,0,0,0
1900 DEFGR$(5)=192,128,128,0,0,0,0,0
2000 'BOUNADENN
2100 BOXF(160,0)-(319,23),0
2200 BOXF(160,45)-(319,67),0
2300 BOXF(0,89)-(319,111),0
2400 BOXF(0,133)-(319,155),0
2500 BOXF(0,177)-(319,199),0
2600 'NASTERMIGOURENI
2700 FOR X=1 TO 16 STEP 5:Y=1:GOSUB 4000:NEXT X
2800 FOR X=4 TO 14 STEP 5:Y=4:GOSUB 4000:NEXT X
2900 FOR X=1 TO 16 STEP 5:Y=7:GOSUB 4000:NEXT X
3000 FOR T=0 TO 1000:NEXT T
3999 END
4000 '
4100 LOCATE X,Y,0:PRINT GR$(0);GR$(1)
4200 LOCATE X,Y+1:PRINT GR$(2);GR$(3)
4300 LOCATE X,Y+2:PRINT GR$(4);GR$(5)
4400 RETURN
  
```



Pêr AR STEUNV


DISKOULM AR C'HOARIOU

- S-K 1: gwer, paper, alkool, koad, alumetez, dirom, eoul-mian.
- S-K 2: c'haec'h stradae Nominoe (ret e oa kemer ul liharenn a bep daou).
- S-K 3: koad + kleiz = ar c'hoad en tu kleiz, evel-just!
- S-K 4: nijal, pod, morea, pempvet, pebr, eoul, Alan, mamm, amann, ran: EHTANER.
- S-K 5: "kit atav war eunn". Aes-tre...
- S-K 6: "hent fall ha!ha!ha! adkemerit an hent d'an arouez daou hent". Sellit mat!
- S-K 7: VI -III = VI - III, setu ez eo ret ober VI-III = 3 kummed.
- S-K 8: "Aet omp d'ar vouro'h". Ret e oa kemer al liharenn a-raok el liharenneg.
- S-K 9: "Kemerit an hent a-sehou". (Karate: K=T, setu D=U,E=V,F=W,G=Z,B=A, h.a.).
- S-K10: KIGENN, MEL, BANANNEZ, SPILBENNOU, AMANN, FIEZ, KONTELL, RIG, FER, HELL, MADIGOU, YOD, GWASTELL, BOUL, DOUR, ASPHJEEZ, AVALOU, KENN, FOURCHETRE, GWIN, GWERENN, ORANJEEZ, BOUC'HAL, SIVI, LAZER.

NEVEZ... NEVEZ? NEVEZ!



Troioù-kaer ar Baron Pouf



Roparz Hemon

TREDE LEVR EUS AR RUMMAD
"SKOL AL LOUARN"

Live teir steredenn

Skrid gant Roparz HEMON
Skeudennet gant A. DIPODE

160 pajenn
Ment 11x17,5 cm

45,00 Lur



ISSN. 0298-5683
ISBN. 2.86843.036.8

AN HERE. Ho levrioù.

